

Pardon Landreguer.

Konje tad a mam a c'houlenan
Ag evit monet da pardonan,

Dar pardon bras da Landregher
E ha oll dud yaouank ar c'hartier

D'ar pardon bras c'houi ne deot ket
Troet eo an avel er leodet

Eur malheur benag zo erruet
eur vagad tud a zo beuzet.

eur vagad tud a Dud yaouank
Bed e voa enni eur seiz a kant

Muia a truez am boa oc'h enni
Voa oc'h eur c'hreg yaouank a voa enni

eur c'hreg o toughen bugale
Muia a truez em boa oute.

Dre ma ie ar vag var e c'hoste
Ar c'hreg man a pede Doue :

Otro Sant Mathelin ma faeron
Grit eur miracl benag evit on.

Me a roio deoc'h eun donezon
A vezo brao deis o pardon.

Me a roio dezoc'h eur chouris koar
Ag a reio an dro do oll douar

Ag a reio an dro do oll douar
A dallek an oter petek en or dall.

Preservit din va innocent
A zo goelet dar mor eb badichant.

Kris a viche ar galon na voelche
Ed od Sant Jan neb a viche

e velet ar mor bras e vervi
Gant goad ar Kristenien e veuzi

Kris a viche ar galon na voelche
En od Sant Jan neb a viche

e voelet ar bughel ag e vam
É vont da interri da Sant Jan.

En e zorn gantan eur bot bizin glas
Da diskuel ma voa kavet er mor bras

Ag eun all var poul e kalon
Da diskuel e voa ganet e mor doun (1).

Titre seulement à fol. 151 r. : Pardon Landreguer.

(1) ou peut-être : donn ?